

# EXEMPL A PUNITION

*Deuz eur Plac'h yaouanc libertin pehini deus bet ar grueldet da laza e fevar grouadur  
condaonet da veza crouguet a devèt ar guer a Roazon*

## VAR EUN TON NEVEZ

Speret santel meo ped da rei din a lumier  
Ar hras da gomposi eur verz spirituel  
Eun exempl a zo guel drist hac eur mélézour patant  
Ma rie reflexion varni an dud yaouanc.

Er blavez mil seiz cant tri ha daou-uguen  
An deuvet a vis du évit rêi da entent  
En escopti a Roazon en dreo euz a zant gloda  
Eh éruas eur maleur a ra dan oll créna.

Eur femelen yaouanc a lignez énorabl  
Euz a dut pinvidic abers mam abers tad  
A banas daou vuguel er moment e voe tentit  
Do étrangli o daou heb beza badezet.

Hoheull eur guzul fall e quemeras eur bal  
Héas da gorn er pare d'ho flanta en douar  
Mez Doue oll-buissant en deveuz bet permetèt  
Dré eun anéval mé ar brim anavet.

Mont a ras dar guer da guz e fallenti  
E zad e remercas hac a houlas outi  
Peleh oc'h u bet goal chenchet bras o cavan  
Deuz a liou a zou guit e seblan ezoh clan.

Respont a ras de zad gant eun er indéferant  
Me vézo exempl da gals a dud yaouanc  
Ma buez a verita beza partout publiet  
Ma rei réflexion varni calz a blahet.

He zad euz e hlévet a ras reflexion  
Var he oll proposition a douchi e galon  
Ha possubl ve ta va merh ven bet ouz o Mezur  
Em be eur hrouadur da rie din displijadur,

Da ben pèvar devez me doa grêt he zorfet  
He zad yas d'ar parc d'a guerhat e loenet  
Pantreas voe estonet o velet eun aneval  
E tenna daou vuguel ermès eus an douar.

Euz a zeiz crouadur e deus bet ma friet  
Ne meus nemet unan oun ganti glaharet  
Lavaret mat e voa dim en bije sur calonat  
Diouz va merc'h libertin a bret pe divizat.

Rédec a ras d'ar guer n'eur goler ar vrassa  
Ma quemeras eun hach en avis he laza  
Mes pa zonjas sqéi ganti e el mat e inspiras  
D'arréti e goler hac e verh a déhas.

Quittad a ras an ty da vit hé daou vuguel  
Hac o facas o daou ebars ne davancher

Hac en nem rentas ganté en ty nautrou Sinéchal  
Da zisléria he sorféjou barbar

An autrou pe hlévas o voa bras estonet  
A chomas eus e dol evel eun den mantret  
Ar bluen demeuz e zorn a goeas crae diganta  
Pa vel an daou vuguel e comans da voela.

Pénos miserables eh eus bet ar galon  
Da laza daou vuguel hep cavet compasion  
Eur bunion guell vras heus-te sur meritet  
Hac a vo hep dale eh enep prononcet.

An trou Senechal a gomant deur serjant  
He laquat er prison neuze zouden vatant  
Er guer demeus a Roazon a dindan seitec devez  
E voe gret e arret ha jujet he froces.

Pa voe interrojet ar justic a estone  
O clevét ar plah-ma e tisléria he bue  
O velet peguer secret e euze he oll hrimou  
Nemet puissanç Doue nanavec aneza.

Eus a bemp crouadur e meus laquet er bed  
Nemet unan zo beo pèvar a meus lazet  
Den sur nen deveus santet va oll hrimou excerabl  
Nemet sur an daou-ma en deus gouezet va zad

Ar henta meus ganet en quichen qêr Vitre  
A dalis er rivier pa voe ganet gane  
Hac an eil a voa maro a ben ma teuas er bed  
A blantis er bern teil en parc va emezec.

A nemet an drede zo chomet en hue  
Entre Kermaria e voe ganet gane  
Er hassis prest d'ar porchet hac eno voe cavet  
Gant daou den anéin o tremen ar vèret.

Neuze voe condaonet da veza divisqet  
Laquet en he herhen eun invis roussinet  
Hac amand énorabl a racas ive ober  
Gant eun torch allumet dirac ilis Sant-Pêr.

A da ilis Sant-Pêr betec ma voe rentet  
En quichen ar potanç true voa e hlevet  
O ouela o teplori o houlen digant Doue  
Eus a greis he halon barados de ene.

Cri vije ar galon en Roazon na ouelje  
O clevet ar plah ma penos e prezegue  
Ha pa bignas d'ar potanç e houlenae amser.  
Da instrui ar yaouanquis he assiste da vervel.

## REFLEXION

En trezoch tud yaouanq qement zo o clevet.  
Comprenit er maro zo dime preparet  
Evit va oll buez fall a va dezboissanç  
E ranqan mervel me-zus siouas ous eur potanç

Me zo en plah certen clevet mat  
Disqet en peb fecon gant ma unan a va sad  
Demeus a zeiz crouadur int am harric ar muia  
Me ra brema dezo var o zreid dizeha.

O ren va unec vloas e voen me recevet  
Gant person va farres gant enor a respet  
Da ober va homunion en touez or vugale  
Pemp bloas e meus bevut en carante Doue.

Da ben va hoezec vloas e voen bet debochet  
Gant diou blah libertin hac o hamaradet  
Ma yen me gante bemmos dar bal a dan dançou  
Va mallos a bedan gant an nep a heuillo.

Tadou ha houi mamou mestrou a mestrezet  
Instruit ho pugale hac ho tometiqet

No lezit qet da vonet da nep seurt assembl  
Na vezo tud honest en compagnunes ganti.

Me zo hirio sivoas melezour digor franc  
Diouallit deus ar bed entrezoh plaheit yaouane  
Pedit Doue d'ho sicour a e vam ar Verhes  
Da bellat diouzoch ar goal gompagnunes.

En em recomand i a ran d'ho pedennou  
Petit Jesus dre e hras d'am receo er joyou  
Mont a ranean d'ar maro pa e meus meritet  
Pardon a houlenann ouz quement zo o clevet.

Quittad ran ar bed-ma leun a dristidiguez  
Va Jesus adorabl ho ped ouzin truez  
Mervel rin ouz eur potanç a va horf vo devet  
Al ludu anean gant an avel strinquet.

Gomprenit va buez entrezoh bugale  
Oboissit d'ho tud balamor da Zoue  
Ha e vezoat sur ean deiz oll da vea curunet  
Gant Jesus en e hloar en pales an Drindet.

AMEN !

## RÉCIT

*Gret var sujet ar Religion arc'hant a gundu ar Veleïen*

## Var an ton a zeziro

Tostaït habitantet, da glevet va reglen,  
Hac a buez var va buez, pa deuan da gompren,  
Casset e meus va speret, partout dre rouantelez,  
Ne velan nemet poanniou, glac'har ha tristediguez,

Doue lavaras d'he ebestel, sentit deus va avis,  
Me ne c'houlennan ket arc'hant, ac a ro dec'h en gratis,  
Evit prezec ar Religion, dre ar bed universel,  
Hac ar re e zelaouo a gredo an Aviel.

Beza meump eur bec'h pounner, entrezomp kristenien,  
Ne velan den espernet, nemet ar veleïen,  
Ar re ze var o c'hondu, o deus diskuellet scler,  
No deveus tam da zouten, demeus ar bec'h pounner.

En amzer ma momb o ren, e man ar veleïen,  
O klask lakat ar poliç, en plaç an archerien,  
M'ho dije bet otorite, e vijent bet kals goassoc'h  
E vijent juge, ha greffier, ha Mair en pep parros.

N'ho deveus na gouel-Mikel, na contribution,  
Netra d'en em separi, evit toach o c'halon,  
Bea o deus ho fancion, digant ar Gouarnamant,  
A c'hoas e teuont da boueza, var groaz ar païsant.

Eur c'hloarec en he barros, pa vezo beleguet,  
N'en em blij ket ho kozeal, gant ar baisantet,  
Nemet heuill an noblançou, ac ive ar vanite,  
Ne zonch mui en buez Jesus, nac en'he baourente.

M'ho deus c'hoant ar veleïen, da lakat o c'haret,  
Ne glevet james sourcial, deus affer den ebet,  
Mes lavaret ho fedennou, gant guir devotion,  
A d'erc'hel zonch a Zoue, ebars en ho c'halon,

A pa e maint en e blaç e klefent sonjal ennan,  
A lezel a maliçou, ac ive madou ar bed-man,  
Mes allas o c'halon, zo stag eus an arc'hant,  
Rac ne reont mui netra, hep kavet paemant.

Pa vez ganet eur buguel : er c'hasser da vadezi,  
Arc'hant en devezo ar beleck; evit e gristenien,  
Pa vo zonet tout ar c'hleier, evit ober ar vadiziant,  
E renker rei d'ar beleck, adarre eur som arc'hant.

Ar c'his so gant ar gomperien, goude an *Te Deum*,  
Da rei dan dud a illis, goude paea ar person.  
Goude p'erruo en oad, evit ober e baskou,  
E vo hanvet gant ar person, da zouguen an drapoïou,